



Programm-skouer « Koad – Garzhaoueg »

Ar programm-mañ zo kinniget deoc'h evel skouer. Ne faota ket heuliañ anezhañ ger evit ger : asambles gant an animatour en-karg deus ho strollad e c'hellfet azasaat, resisaat, hiraat, berraat an traoù, hervez ar vugale ha hervez ho raktres, pe c'hoazh meskañ an tem-mañ gant obererezhioù a denn deus un tem all.

Lun	Meurzh	Merc'her	Yaou	Gwener
<i>Erruout</i> Gweladenniñ ar greizenn, ar bourk hag an tipi	E koad ar Markiz Dizoloiñ ar c'hoad dre e bemp skiant Pourmenadenn gant istorioù	Al Iapoused Sell a-dost gant jumelloù Stalioù-labour : pluñv, neizhioù, boued, broierezh	E Koad an Noz Loened bihan an douar : an divellkeineged	<i>Rankañ ar c'hambreier</i> « Ma louzaoueg kentañ »
Merenn	Pik-nik	Merenn	Pik-nik	Merenn
Klask roudoù loened ar c'harzhaoueg	Anavezout ar plant, dastum lod anezhe Gwazkañ an delioù dastumet	Sevel tier-neizhañ Skejañ polotenoù dislonkañ ar c'haouenned	Ar poull-dour : ur c'hempouez bresk. Loened ar poull-dour	Land art Sevel c'hoarioù paotr-saout C'hoari bilañs
Adverenn	Adverenn	Adverenn	Adverenn	Adverenn
<i>Amzer vak</i>	<i>Amzer vak</i>	<i>Amzer vak</i>	<i>Amzer vak</i>	<i>Loc'hañ</i>
Koan	Koan	Koan	Koan	
<i>Beilhadeg vak</i>	Beilhadeg Kejañ gant loened an noz (kaouenned ha logod-dall)	<i>Beilhadeg vak</i>	Beilhadeg kontadennoù	

Dizoloiñ al loened hag ar plant gouez a servij d'ar vugale da gompren gwelloc'h an endro naturel en-dro dezhe, ha neuze da doujañ outañ. Met ar c'hoadeier zo ivez lec'hioù sevenadurel : a-viskoazh zo bet tud enne, o labourat, o studiañ, pe o kontañ marvailhoù...

